

## I

Lavar d'in-me, Avel glemmus,  
 A hirvoud en-dro d'ar c'hoajou,  
 Pelec'h'man ar vro evurus  
 Lec'h na skuilher ket a zaërou ?  
 Pelec'h eman an draonien gled,  
 Kollet e-kreiz ar c'hlazenen,  
 Pell euz trouz trubuilhus ar bed,  
 Lec'h eman an holl dud laouen ?...  
 An avel a respont, neuze :  
 « Morse na weliz ar vro-ze ! »

## II

Lavar d'in-me, Donder ar Môr,  
 A guz tensoriou diniver,  
 Anvezez-te eur-vro, digor  
 D'ar blijadur ha d'ar sioulder ?  
 Eul lec'hik, barz en eur vro bell,  
 Glaz, ha leun a evurusted,  
 E-lec'h na c'houez ket an avel,  
 E-lec'h na sko ket ar c'hlenved ?  
 Ar gwag respont, gand eun drouz don :  
 « Euz ar vro-ze na gleviz sôn !... »

## III

Lavar d'in-me, Loar ar nenvou  
 Gand da zrem glân hag alaouret  
 A ro sklerijen d'an noziou  
 Pa ve kousket peb den, er bed,  
 Lavar d'in-me hag en az tro  
 Ac'h euz gwelet eur vro diboan,  
 Eur vro n'anvez ket an daëro,  
 Eur vro na glev ket a glemvan ?  
 Al Loar a guzaz er goabren  
 N'anveze bro'bed evelhen.

## IV

Lavar d'in, Ankou didruez,  
 Pa ne oar Avel, Loar, Donder,  
 Hag eun tu bennag anvezez  
 Eur vro e-lec'h e ver seder ?  
 Daoust hag en tu-all d'ar maro  
 E zo eur vuhez dudius,  
 'Lec'h na glever ket a c'harmo,  
 'Lec'h man ar re-vad evurus ?  
 Hag an Ankou, gand eur vouez krenv  
 « Ar Vro-ze, 'mezan, zo en Nenv ! » :

F. JAFFRENOU.